

## Tem 4:an Eil Brezel-bed: ur brezel distrujiñ (1939-1945)

### Kouplabl on da:

### I. Anavezout mareoù pennañ an Eil Brezel-bed

#### 1. Emgannoù-trec'h an Ahel : 1939-1942

-01/09/1939:aloubiñ a ra Alamagn Polonia.

-Mae 1940: tarzhiñ a ra ar brezel: aloubet eo Belgia hag Izelvroioù get ar **WEHRMACHT ( blitz= luc'hed (éclairs) ha krieg= brezel)**

-Miz Eost 1940-Mae 1941: ar Blitz : bombezennet eo kêrioù saoz get ar **Lufwaffe(arme-aerlu)**.

14/06/1940: aloubet eo Pariz; Ar Marichal Petain a c'houlenn un arsav-brezel d'an 17/06/1940 , sinet d'an 22/06/1940.Echu eo an Ilivet Republik : ganet Frañs da vare Vichy.

-22/06/1941:**Argad Barbarossa: aloubet eo URSS get an Ilivet Reich.**

-7/12/1941: taget eo morluad amerikan er Meurvor Habask:**PEARL HARBOUR** get an Impalaeriezh Japan: donedigezh SUA er brezel

#### 2.1942-1943: an avel é troiñ: blezad-tro an Eil-Brezel Bed

-Even 1942: emgann Midway

-Here 1942: emgann El Alamein

-C'hwevrer 1943: trec'het Alamagn e Stalingrad

-Dilestradegoù e Normandi (**Overlord**) d'an 6/06/1944 hag e Provañs d'an 15/08/1944

-Pariz dieubet d'an 25/08/1944 a-drugarez d'an FFI

-8/05/1945/ arsav-brezel

-**Bombezadeg Hiroshima (06/08/45) ha Nagasaki(09/08/45): achumant ar brezel.**

### II. Emgann Stalingrad, arouez ar stourmoù soudardel hag ideologel

- Padout a ra an emgann Stalingrad etre 17 a viz Gouere 1942 ha d'an 2 viz C'hwevrer 1943.
- Emañ an emgann etre an arme alaman enep d'an arme soviedel.
- **Arouez ar brezel distruj** eo an emgann Stalingrad kaset a-benn get an Alamanned hag ar Rusianed, àr-lerc'h aloubadeg URSS get Hitler d'an 22. 06.1941.

### Deiziadoù pouezus:

1939-1945: an Eil Brezel-bed


1945: dieubidigezh ar c'hampoù distrujiñ

8 a viz mar 1945: arsav-brezel hag achumant an Eil Brezel-bed

Eost 1945: bombezennoù Hiroshima ha Nagasaki



**Hitler(1889-1945).** Stourm a ra en arme alaman e-pad ar Brezel pevarzek.Mezhekaet-du e oa bet get an drouziwezh. E 1919 e kemer penn strollad broadelour socialist alaman al labourerien(strollad nazi). Kinnig a ra e vennozhioù en e levr *Mein Kampf*. Galvet eo get Hindenburg e 1933 evit kemer ar garg a gañseller . Sevel a ra ur renad totalitaerel hag enepsemitegezh. E bolitikerezh a gas an Eil brezel-bed e 1939. Marvet eo dre emlazh e 1945.



#### ➤ 4 maread a voe:

- An araoakadenn alaman àr-zu ar gêr Stalingrad etre Gouere-Eost 1942
- An argad alaman etre Gwengolo ha Du 1942.
- An enep-argad rus ha kelc’hiet eo an Alamaned etre 19.11. 1942 ha 10. 01. 1943
- An aloubidigezh betek kapituladur ha serriñ ar marichal Von Paulus d’an 2. 02. 1943.

➤ **Palioù Hitler: Lenigrad en Norzh, Moskow e kreiz hag ar C’haokaz er Su.** Torriñ a ra Hilter ar pakt nann argadiñ, ar pakt sovedel-alaman sinet d’ar 23. 08.1939. Evitañ e rank stourmiñ enep d’ar « yuzev-bolcheviked » a-benn **brasaat an egor-buhezva alaman, yevañ (asservir) ar poblañsoù koñsideret izelañ**, amañ ar slaved, ha pobliñ an takadoù aloubet get ar bobl german. **Ur gêr industriel eo Stalingrad, arouez an hent Bakou ha hidrokarburioù ar mor Kaspia.**

➤ **Evit Stalin**, daet eo Alamagn da vout **tretourez hag e rank bout distrujet a-benn savetiñ ar mammvro enep d’an alouber.**

➤ An daou du a ro pep tra evit bout trec’h. **Mobiliziñ a rant o ekonomiezh hag o zud.** Andur a ra ar gêr Stalingrad get argadoù alaman ha bombezennoù alaman met e resist ar Rusianed é stourmiñ e-barzh emgannoù straed taer-tre: **ar brezel kêr eo.**

➤ An daou du a souten ar striv-brezel é mobiliziñ o foblañsoù **get ur propaganda efedus ha puilh a-benn gwarn kalon ar boblañs.**

Da vare an emgann, pal dezhi eo distrujiñ penn-da-benn an enebour, ne vern ar siviled, ar vugale, ar vaouezed hag ar re gozh.

➤ **Mantrus eo an dud marv** hag an distrujoù: àr-lerc’h 6 miz emgann get 1 milion a soudarded. Trec’h e voe an Arme rusian hag a zo daet a-ben da gelc’hiiñ ha distrujiñ ar VIVet ame alaman.

➤ Spisverkiñ a ra an droukiwezh alaman-mañ **deroù diskar Alamagn nazi.**

➤ Hiziv-an-deiz Stalingrad eo Volgograd.

### III. Deskriviñ ha displegiñ gouennlazh ar Yuzevien hag ar Dziganed

#### A. Ag ar c’has e-maez ag ar gevredigezh d’ar prizoniiñ




#### **Winston Churchill 1874-1965**

Politikour saoz

Kentañ Ministr e oa etre 1940 ha 1945.

Bet eo betan hani en deus dalc’het Bro-Saoz a-dal d’an Ahel.

Degemer a ra ar jeneral De Gaulle hag e ra fiziañs ennañ.



#### **Franklin D. Roosevelt 1882-1945**

Prezidant ar Stadoù Unanet Amerika etre 1932 ha 1944.

Àr-lerc’h tagadenn Pearl Harbor 1941 e kemer perzh er brezel get ar Gevredidi (R-U hag URSS).

An Eil Brezel-bed:

**Ur brezel distruj(peurziskar):** gouennazh ar Yuzevien hag ar Tziganed get an « Diskoulm Diwezhañ » 1942

50 million a dud marv; bombezennoù slapet àr ar siviled  
Ar marv industriel: programmiñ da gas d’ar marv miliadoù a dud er c’hampoù distrujiñ.

**Ur brezel ideologel:** an Nazied a zo enep komunist, enepyuzev, gouennelour, diazezet eo o ideologiezh àr ar c’hoant da vrasaat an egor-buhezva e Reter;

Talvoudegezhioù ar Gevredidi( An demokratelezhioù) a zo diazezet àr ar frankiz, an demokratelezh;

URSS, ur Stad totalitaerel a ra ar brezel evit ar mammvro hag a zo enep faskour.

**Ur brezel hollek hag industriel:**

Un ekonomiezh troet àr-zu ar brezel, ar striv get ar boblañs en a-dreñv, mobilizadur ar speredoù(propaganda...), ur brezel àr an douar, àr ar mor, en aer

- Sevel a ra Hitler ur gelennadurezh(doktrin) diazezet àr **dreistelezh ar « gouennoù »**; lakaat a ra ar ouenn arian(pobl german ha skandinav) e-penn, « an Aotrouien hag ar Vrezelourien ». Gellet a ra ar « ouenn » arian mestroniñ ar « gouennoù » arall koñsideret **is-tud, èl ar Yuzevien ,ar Dziganed... koñsideret noazus.**
- **An naziakadur e vez graet ag ar gelennadurezh gouennelourel hag enepsemitagezh(enepyuzev).**
- E-penn kentañ donedigezh Hitler er galloud e krog da vout heskinet ar Yuzevien get **ar lezennoù Nuremberg e 1935 ha 1938**, ret dezhe lakaat **ar steredenn velen, ar pogrom(Noziad Strink e 1938 e München enep d'ar sinagogenn)** , kaset eo ar Yuzevien **er c'hampoù-kreizenniñ, e Frañs e voe statud ar Yuzevien e miz Here 1940..**
- Pa krog ar brezel e 1939, pal Hitler eo distrujiñ ar « ouenn » yuzev en Europa. **Niveret, anaouet eo ar Yuzevien e-barzh pep Stad edan dalc'h an Illvet Reich** a-benn aesaat o arsav(arrestation) e-pad ar skrapadegoù(rafloù).
- **Strollet int e-barzh ghettoioù(diàr an italianeg): karter e kêrioù Kreiz-Europa**, dalc'het get an Alamaned a vode ar Yuzevien e tachadoù bevennet strizh. Brasañ ghetto , hani **Warszawa**, a zo savet e miz Du 1940. Bodet eo 550 000 a annezidi yuzev e 1941. **Lazhus eo an doareoù –beviñ:** mervel a ra ar vugale hag ar gozhidi get an naon hag ar riv en abeg d'an diouer a voued, ar feulster anduret, an diouer a yec'hedoniezh. Etre miz Ebrel 1943 ha Mae 1943 en em savas an annezidi ag ar ghetto, kentoc'h evit asantiñ d'e zistruj . Padout a ra teir sizhuniad an emsavadeg. E miz mae 1943 e voe flastret ar ghetto Warszawa.

## **B. D'an toull-bach betek an distrujiñ**

### **➤ Krogiñ a ra an distrujiñ**

Krogiñ a ra an distruj get aloubadeg URSS get Alamagn e miz Even 1941.

Ambrouget eo ar bagadoù alaman get **an Einsatzgruppen**, karget da drouklazhiñ rac'h ar Yuzevien pe resistañted: **750 000 den drouklazhet etre Even 1941 ha Genver 1942.(Shoah par balles).**

- D'an 20 a viz Genver 1942 da vare **ar brezegen nazi Wannsee** e voe dizivet, edan renerezh Hitler, deportiñ **ha drouklazhiñ ha distrujiñ a-vil vern an holl Yuzevien a Europa** e-barzh kampoù distrujiñ get kambreier gaz, lec'hiet an holl e Polonia, da lâret eo 11 milion a vugael, maouezed ha paotred: an “ **an Diskoulm diwezhañ**” e vez graet ag an darvoud-mañ.

## **C. Ar c'hampoù kreizenniñ hag ar c'hampoù distrujiñ:**

- **Kampoù tremen**, èl hani Drancy e biz Pariz, digor e miz Eost 1941 àr-lerc'h rafl ar Yuzevien ag an XI arondisamant Pariz. Digor eo e-pad 3 blez edan evezh en diavaez hag en diabarzh get jañdarmed c'hall. **Spontus eo an doareoù-beviñ:** 9 yuzev a Frañs àr 10 a dremene dre ar c'hamp-mañ.
- **Ar c'hampoù kreizenniñ** a resev da gentañ an enebourien politikel, Kristenien, tud heñvelreizh, ar Slaved, ar resistañted. Ret eo an dud yac'h labourat a-benn treuzveviñ.
- Kaset eo ar Dziganed hag ar Yuzevien er **c'hampoù distrujiñ:** aozet eo d'ar c'has **d'ar marv en doare industriel:**

-dibab ar re deportet : ar “re greñv”(paotred) kaset da labourat betek ar marv. Ar re “wan”( maouezed, bugale, tud kozh) kaset d'ar marv e-barzh kambreier gaz (Zyklon B).  
-Ar **sonderkommandos** a zo karget da dreuzkas ar c'horfoù marv ag ar c'hambreier gaz betek ar fornioù devañ korfoù.

- **Chelmno** e Polonia eo ar c'hentañ kamp distrujiñ , digor e Kerzu 1941. **Auschwitz-Birkenau** eo an hani brasañ: gazet e voe 8000 yuzev bemdez e-barzh peder c'hambur gaz a-raok bout kaset e-barzh ar fornioù devañ korfoù; ur milion a yuzevien a voe marv.

➤ **AR SHOAH (gwallreuz e hebraeg catastrophe), LOSKABERZH(Holokaost, ag ar gresianeg aberzh get an tan(loskiñ tud)) a vez graet ag an distrujidigezh hag an heskinerezh-mañ.** 60% ag ar Yuzevien a Europa da lâret eo 5-6 milion , 34% ag ar Dziganed da lâret eo 240 000 tzigant marv.

"Tous les hommes doivent être en garde contre le réveil en eux de la brute cruelle et sauvage. La civilisation, la justice et l'amour sont fragiles." André Maurois